

# AN ALARCH<sup>(1)</sup>

En amzer-ze e oa distag-kaer Breiz ha Bro-C'hall an eil diouz eben. Breiziz a oa mistri en o bro hag ar Challaoued en o hini, met brezel a on e Breiz, tri bloaz war-nugent a oa, etre diou gostezenn, hini Yann Vontfort hag hini Charlez Bleiz, harpet, ar genia anezo, gand ar Zaozon hag eben gand ar C'hallaoued, o klask gouzout piou anezo o daou a zougje kurunenn Breiz, warlerc'h an Duk Yann III, marvet disher, d'an 30 a viz ebrel 1341.

Kostezenn ar Vontforted a jomas an trech' ganti d'an 29 a viz Gwengolo 1364, pa voe lazet Charlez Bleiz, du-hont, war lanneier Alre, harp e Keranna.

Siouaz, trech'het war dachenn ar brezel, enebourien Yann Vontfort a labouras, dre zindan, hag a lukeas ar Vretoned d'en em zevel a eneb o duk, a rankas mont d'an harlu da Vro-Zaoz. Nebeud bloaveziou goudeze, pennou bras Breiz, pa weljont edo o bro o vont da veza staget ouz ar Frans, en em unanas hag a gasas eur c'hannad da Vro-Zaoz, da bedi Yann IV da zistrei: ober a eure e ziskenn e Dinard d'an 3 a viz eost 1379, da lavarout eo breman ez eus 550 vloaz, e kreiz ar bleuniou hag ar meuleudiou: Bretoned a bep renk a ziredas d'e zaludi. Intanvez Charlez Bleiz, Janned Penteur, hec'h unan, e giniterv-gompez hag e enebourez touet, betek neuze, a deuas da zaouлина dirazan hag a roas evelse eur skouer hep par o lakaat silvidigez ar vro da dremen a-raok pep tra hag eus an eil menez d'egile e klevjod o trevern ar c'han-man, kan an alarc'h:

*Tempo di marcia*

Eun a-larc'h, eun a-larc'h tre-mor, Eun a-larc'h, eun a-larc'h tre-  
mor, War lein tour moal kas-tell ar - vor ! Din din daon ! d'an em-  
gann ! d'an emgann , o ! din din daon ! d'an em - gann ez an !

(1) *Alarc'h = cygne, e galleg.*

Eun alarc'h, eun alarc'h tremor,  
War lein tour moal kastell Arvor !

Din ! din ! daon, d'an engann, d'an engann, o !  
Din ! din ! daon, d'an engann ez an !

Neveenti vat d'ar Vretoned,  
Ha malloz ruz d'ar C'halloued !

Erru eul lestr e pleg ar mor,  
E ouelioù gwenn gantan digor;

Digouet an Aotrou Yann endro,  
Digouet eo da ziwall e vro ;

D'hon diwall diouz ar C'halloued,  
A vres gwiriou ar Vretoned.

Ken e laosker eur youc'hadenn  
A ra d'an aod eur grenadenn.

Ken e tasson meneziou Laz  
Ha ken e trid ar gazeg c'hlas.

Ken e kan laouen ar c'hlleier  
Kant leo tro-war-dro, e pep ker !

Deuet eo an heol, deuet eo an hanv,  
Deuet eo en dro an Aotrou Yann !

An Aotrou Yann a zo paotr mat  
Ker prim e droad hag e lagad.

Gand e gleze ker krenv e tare'h  
Ken e taouhanter den ha marc'h.

Neb a drouc'h 'vel ma trouc'hez-te,  
N'en deus aotrou nemet Doue !

Dalc'homp, Bretoned, dalc'homp mat,  
Arzav na truez, gwad ouz gwad !

Skrigna 'ra bleizi Breiz-Izel.  
O klevout embann ar brezel;

O klevout ar you e yudont ;  
Gant c'houez ar C'hallaoued e reont.

Paozed Bro-C'hall, 'lec'h ma kouezint  
Betek deiz ar yarn e kouskint.

An diveradur eus ar gwez  
'Ray dur benniget war o bez !